

~ DANVEZIOÙ ~

Danvez a bep seurt a c'hallit kavout evit sikour ac'hanoc'h da glask un anv.

WAR-FET AL LEZENNOÙ :

- * « **Voies et adresses : les procédures légales et les bonnes pratiques en vigueur** », gant AITF (Kevredigezh an ijinourien diriadel e Frañs), 2020
- * « **Guide d'accompagnement à la dénomination et à la numérotation des voies** », gant Géo Pays de Brest, porched an titouroù douaroniel, 2020

WAR-FET AR SEVENAOUR :

- * « **Lec'hanvadurezh Breizh, un teñzor da zerc'hel** », gant ar gevredigezh Kevre Breizh, 2016
- * « **Les noms qui ont fait l'Histoire de Bretagne, 1 000 noms pour les rues de Bretagne** », gant Emmanuel Salmon-Legagneur, Coop Breizh ha Skol Uhel ar Vro, 1997

INGALDED MAOUEZED/GWAZED :

- * « **Ces femmes qui ont fait la Bretagne** » gant Nathalie de Broc, Ouest-France, 2019
- * « **Dictionnaire des femmes de Bretagne** », dindan renerezh Jeanne Urvoy, Coop Breizh ha Skol Uhel ar Vro, 2000
- * HF Bretagne : <https://hfbretagne.com/>, bretagne@mouvement-hf.org, 06 52 91 81 74.

YEZHOU BREIZH :

- * Ofis publik ar brezhoneg : www.fr.brezhoneg.bzh/, ofis29@opab.bzh, 02 98 99 30 10
- * Institut du Gallo : www.institutdugalo.bzh/, contact@institutdugalo.bzh, 06 69 18 86 66
- * Kevredigezh Chubri : www.chubri-galo.bzh/, chubri@chubri.org, 02 99 84 08 87

Kuzul Sevenadurel Breizh zo ur vodadenn guzuliañ hag a oa bet krouet e 2009 gant Kuzulrannvro Breizh. Enni ez eus 70 ezel hag a zo aze en anv an obererien bennañ war dachenn ar vuhez sevenadurel, an arzoù, ar glad hag ar yezhoù e Breizh. Goulennet e vez ali ar vodadenn gant ar C'huzul-rannvro diwar-benn kement tra hag a sell ouzh identelezh sevenadurel Breizh hag he brud. Labour ar C'huzul eo reiñ alioù, sevel danevelloù ha kas studiadennoù da benn.

Darempred : conseil.culturel@bretagne.bzh / 02 99 27 18 31



Kuzul sevenadurel Breizh
Conseil culturel de Bretagne
Qonsail qhultural de Bertègn



Kuzul sevenadurel Breizh
Conseil culturel de Bretagne
Qonsail qhultural de Bertègn

REIÑ ANVIOÙ D'AL LEC'HIOÙ FORAN: ERBEDADENNOÙ



Penaos reiñ un anv d'ul lec'h foran :
kumuniezhoù-kumunioù,
kumunioù nevez,
straedoù ha kêriadennoù ?

GENVER 2021

Kuzul sevenadurel Breizh a ginnig amañ un toullad alioù fur abalamour da **envel** al lec'hioù foran **en un doare dibar ha hep lakaat tabut da sevel**.

REIÑ ANVIOÙ : PERAK ?

Hiziv an deiz ez eo an anvioù hag an delwenoù aferioù politikel, muioc'h eget biskoazh, hag e Breizh ivez emañ ar gaoz war ar sujed-se.

Ur binvidigezh evit hor glad eo an anvioù-lec'hioù (kumunioù, straedoù, kêriadennoù...) hag ivez ur merk kreñv eus an **identelezh sevenadurel**.

Ganto e weler levezon ar pobloù war ur vro hag al **liesseurted sevenadurel** e Frañs. Liammet eo ar glad-se ouzh un istor, istorioù, un identelezh, identelezhioù. **Un teñzor eo ar memor boutin-se ha ret eo mirout anezhañ**.

Pouezus-bras eo ar mod ma vez choazet un anv. Gantañ e c'haller **envel** (straedoù, hentoù, hentoù-dall, plasenoù ha kement zo) hag **en em lec'hiañ** (niverennoù an tiez) en un doare skoueriekaet. Er bed m'emaomp o vevañ e vez muioc'h-mui a bouez gant ar servijoù douarlec'hiañ, rak-se eo dav kaout **chomlec'hioù skoueriekaet ha dibar** e pep lec'h er vro : emelloù ar servijoù sikour, skignañ pakadoù, mont-dont gant ar GPS, servijoù er gêr, pe staliañ ar c'has uhel-kenañ.



Bonn eus an 3^e kantved
bet kavet e Roazhon,
© Mirdi Breizh

Neuze e talvez an anvioù evit kement implij a vez (douarlec'hiañ), ha stag int ivez ouzh buhez personel an dud (al lec'h m'emañ o vevañ).



Plakenoù-straed kozh, lakaet e gwerzh gant Ti-kêr Gwengamp, © Le Télégramme

GOUZOUT A RIT ? GALLOUT A REER CHEÑCH ANV !

Gallout a reer **cheñch anv** ur gumun kuit da veskañ gant unan all pe evit doujañ an doare ma vez distaget gant an dud er vro. Goude bezañ goulennet ali ar c'huzul-departamant e vez kaset ar goulenn betek ministrerezh an diabarzh en ur dremen dre ar prefeti.

DOUJAÑ AN ANVIOÙ ORIN

Alies e vez distummet pe troet fall anvioù ofisiel ar c'humunioù, ar straedoù pe ar c'hêriadennoù a zeu diwar ar brezhoneg pe ar gallaoueg.

Evit ar brezhoneg ez eus lakaet un diaz roadennoù (**KerOfis**) e kerz an holl gant Ofis publik ar brezhoneg (OPAB). Evit ar gallaoueg ez eus ur roll skoueriekaet eus an anvioù kumunioù kinniget gant **Institut du Gallo**, hag a c'haller kavout ivez e-barzh lec'hienn ar gevredigezh Chubri (**ChubEndret**).

ENVEL AN HENTOÙ PUBLIK : BARREGEZH AR C'HUMUNIOÙ HEPKEN

Abaoe 1982 eo **barregezh ar c'humunioù hepken** envel an hentoù publik, hervez ar mellad L2121-29 e Kod hollek ar strollegezhioù tiriadel : « ar c'huzul-kêr, dre e zivizadegoù, a ver aferioù ar gumun ».

Ret eo d'an **anv** roet d'un hent publik pe d'ur savadur publik kotañ gant al laz foran lec'hel. Gant se ez eo, **arabat** d'an anv roet d'ul lec'h foran bezañ **e-tailh da vont enep an urzh vat, na da feukañ an dud, na da noazout ouzh brud ar gêr pe ar c'harter**.

Ret eo d'an anv doujañ da **bennezh ar servij publik a rank bezañ neptu**. Diwar se eo gwell chom hep reiñ anv un den bev c'hoazh d'un hent pe d'ur savadur publik, dreist-holl m'en dez an den-se kargoù e bed ar politikerezh.



Panneloù mont tre e kêr teiryzechek,
© Dielloù Ouest-France

~ ERBEDADENNOÙ ~

Kinniget ez eus amañ, gant ar C'huzul sevenadurel, un toullad erbedadennoù evit **choaz un anv** (kumuniezhioù-kumunioù, kumunioù nevez, hentoù, kêriadennoù...) **dre genemglev, en un doare dibar hag a zouj** an istor, an dud hag al lec'hioù. Erbediñ a ra da gentañ-penn **un doare perzhiañ** da envel al lec'hioù foran hag a zouj ar gwirioù sevenadurel.

Da gentañ eo dav ober diouzh ma vo lakaet an dud da gendivizout :

- * **Staliañ ur strollad labour maouezed ha gwazed enañ hanter-ouzhhanter** un tamm amzer a-raok lañsañ ar raktresoù kêraozañ, ma vo bodet dilennidi ha kevredigezhioù istor (pe dud hag anavez mat istor ha gizioù ar c'hornad, kevredigezhioù gouiziekl, kelennerien skolver ha kement zo) evit sevel kinnigoù arguzennet ;
- * **Pediñ an OPAB hag Institut du Gallo da gemer perzh er c'hendivizoù** abalamour da brientiñ an troidigezhioù en a-raok ha da gemer ar pleg d'ober gant meur a yezh ;
- * **Kelaouiñ** an dud (kazetenn ar gumun, diskouezadegoù...) hag aozañ emvodoù foran evit kelaouiñ ha displegañ ;
- * **Kinnig ur referendom lec'hel ma vez ezhomm**, pa'z eo ur benveg evit an demokratelezh lec'hel ha perzhiañ.



Prenet e oa bet ar blakenn-straedmañ gant Ti-kêr Roazhon er bloavezhioù 1950, met biskoazh n'eo bet staliet
© Mirdi Breizh

Evit choaz un anv hag a vo anavezet ha degemeret aes gant an dud, chom hep kemer unan re heñvel ouzh un anv all (an arguzenn « Google map »).

~ UN TOULLAD EVEZHIADENNOÙ ~

EVIT AR C'HUMUNIOÙ :

- * **Sevel** kartennoù gant anvioù ar straedoù hag ar c'hêriadennoù en o stumm nevesaet.
- * **Lakaat votiñ ar steuñv rummadiñ** diouzh ar yezhoù dibabet (galleg / brezhoneg / gallaoueg).

EVIT AR C'HÊRIADENNOÙ :

- * En em harpañ, pa c'haller, **war mammskridoù ar gladroll kozh** ;
- * **Ober gant un doare-skrivañ unvan** dibabet ha displeget ;
- * **Delc'her kont eus an doare ma vez distaget er vro, gant sikour an OPAB hag Institut du Gallo**.

EVIT AN HENTOÙ :

- * **Diazezañ chomlec'hioù diouzh ar reoladoù** (niverenn, hent, kêriadenn) evit pep annez ;
- * **En em harpañ war al lec'hanvioù a zo dija** (mammskridoù ar gladroll kozh ha kartennoù mor evit kumunioù an arvor) ;
- * Klask anvioù hep o far ha dibab kentoc'h **anvioù tud** hag o deus ul **liamm sevenadurel kreñv gant ar vro**, hag anavezet e Frañs a-bezh pe er bed ma vez gallet. Arabat klask bezañ deuet mat da dud zo ;
- * **Lakaat implij yezhoù Breizh da vezañ un dra reizh** ha broudañ an divyezhegezh, diouzh an den dibabet (skrivagner brezhonek pe gallaouek, lakaomp) ;
- * **Adkempouezañ evit a sell ouzh roll ar maouezed er gevredigezh** gant sikour an enklaskoù hag ar c'horpusoù a zo bet savet (sellet ouzh fin an teul-mañ) ;
- * **Kelaouiñ an dud war an den choazet** (lec'hienn Internet ha kazetenn ar gumun, QR kod, diskouezadeg) ha displegañ peseurt oberoù zo bet kaoz d'ar choaz, daoust ma ne oa ket direbech atav buhez an den pa seller outi hiziv an deiz.